

- 139 -

Dastumad Pennwern : dornskrid 89

52. POD MARO GANT C'HOANT PLAC'H

(Follennoù 171 - 172)

1. An tad dar mab a lavare :

- " Setu va mab ker koant ha me " -

Allons, allons, violons :
Allons, allons, vielles !

2. - "Petra dall dime beza koant,
 Pa na zemezan pa meus c'hoant?" -

3. - " Tavit, va mab, na voëlit ket;
 Ar blas a zeu e viot demeet." -

4. - " Ar blas a zeu, pa vin maro,
 Demezet an ep a garo.

5. - " Pa vezin maro hag interet,
 Lakit va be kreiz ar verret.

6. - " A vo varnezan peder rosen,
 Diou a vo rus, diou a vo guen.

7. - " Ma lavaro ar merc'hed iaouank :
 " Aman e laket an hini koant.

8. - " Aman e laket an hini koant
 " Zo ed en douar gant he c'hoant.

9. - " Zo ed en douar gant c'hoant plac'h :
 " Meur a hini a ielo c'hoas."

Allons, allons, violons !
 Allons, allons, vielles !

 vvvvvvvv

Jannet Puill, 14 janvier 1851

 vvvvvvvvvvvvv